



# CANTIC

VAR BUEZ SANT ISIDOR,

PATRON AL LABOURERIEN.

*Var an ton ancien.*



**D**RINDET santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin,  
 Me ho ped da rei graçou d'ho servicher indign,  
 Da gomposi ur c'hantic en gloar hac en enor  
 Da Batron al Labourer, ar Zant bras ISIDOR.

C'hoant ha desir bras ameus, gant ar c'hraç a Zoue,  
 Da zisclêry d'ar Vretonet an tenor e vue  
 Al lec'h ma voa bet ganet, e gontre hac e vro,  
 E oberiou excelant, ivez e vertuziou.

Mes, Majeste adorabl; Doue, Roue an Trôn,  
 Tranquilisit va speret, ha tomit va c'halon,  
 Ha roit din hoc'h asistanc ebars em antrepris,  
 N'ouffen qet bea goassa, ervez ma meus avis.

Honont ar guêr gapital a Spagn, hanvet Madri;  
 E devoe an avantach guechal da brodui  
 Ebars en o fobourziou ur rosen precius;  
 An Autrou Sant Isidor, miguon bras da Jesus.

Bars en creiz ar haourentez ec'h antreas er bed,  
 Ha demeus ar haourentez e ressentas bepret;  
 E guerent a voa roturier, a vadou dibourve;  
 Mes leun oant a santelez hac a zoujanç Doue.

Representi a rejont, gant peb rejonissanç,  
 Ar rejeton admirabl en templ gant dihjanç,  
 Ha var fons-badiziant e visqas ar zê venn,  
 Pehini n'en deus souillet biscoas e nep moyen.

Isidor ê bet hanvet, balamour d'an enor  
 A zougue ar Spagnolet d'eur zant all Isidor,  
 Escop bet e Seville, pa voa var an douar,  
 Hac erfin eus e vue recompanset er gloar.

E dad a voa sourcius, e vam a voa ive,  
 Da instrui Isidor el lezen hac er fe:  
 Carante hac union, exempl mad ha doctrin,  
 Eo a rê an ornament eus o bue divin.

Ah! pebes contantamant da un tad ha d'eur vam,  
 Cavet digant un Doue ur buguel qen diylam!  
 Qen douç, qen oboissant, qen pur ha qen parfet,  
 Qen humbl, qer carantezus, qen docil, qen caret!

Pa deuas sqient dezàn, ec'h offras da Zoue  
 Ar faculteou santel demeus e oll ene,  
 E volonte, e speret, hac ivez e vemoar,  
 Hac e vuez en antier da bossedi ar gloar.

Ar sonjesonou frivol ne gavent qet a blas  
 E speret Sant Isidor, dont a rê d'o bargas;  
 E galon oa siellet, na elle mann antren  
 A guement a oa control d'ar fe ha d'al lezen.

Ar sansou eus an natur oa gantàn reglet mad,  
 Eus an enoriou monden ne rê get a etat;  
 En ur guir, goell oa gantàn mil ha mil guech mervel,  
 Eguet dont da gometi james pec'het marvel.

Pa deuas gallout dezàn, hac én cresqet en oad,  
 E tilezas e famill, e has da labourat;  
 Evel ma oa ezomec eus a vadou ar bed,  
 E renqas mont da gopra evit gounit e voued.

Evit gallout substanti ha beva e famill,  
 En em laqas da vevel e ti un dijentil,  
 Da di an autrou Vergas, eus ar guêr a Vadri,  
 Den a galite huel, e has da servichi.

Ebars er profession demeus a guir Gristen  
 Oa fidel ha ponctuel da viret e lezen:  
 Ebars er profession demeus a Labourer  
 Oa fidel ha ponctuel da ober e zever.

Pell qent an de e save Isidor bep mintin,  
 Ha dirac ar grucifi prosternet d'an daoulin,  
 Gant ur barfetet ampar a gorf hac a galon  
 E rê d'an Autrou-Doue peden hac orêson.

Hoguen dre ur jalousi d'e vestr voc accuset  
 A enep guir ha rêson gant e gamaradet  
 Da vea lach, feneant, disouròi, dibreder,  
 Ha na rê beinde c'houlou nemet coll an amzer.

Toret ê oll, emeze, o c'horf gant al labour;  
 Ne brise get Isidor donet tam d'o zicour,  
 Nemet bea red-dired beinde d'an ilisou,  
 Hac ober e hiprocrit, laret chapelelou.

Ar mestr evel ma c'lévas an accusation ;  
A laras gant garantez : Isidor , va mignon ;  
Me ne meus qet ho caget da laeres an amzer ;  
Rac-se bezit fideloc'h ur vech all d'ho tever.

Isidor a respontas gant un drêm gracios :  
En despit d'an oll valiç eus an dud anvius ,  
Me servicho da guenta Jesus , Mab da Vari ;  
Ennàn ema va fisianç , va support , va appui.

Un deiz e c'has Isidor d'e labour divezat ,  
E vestr hac e partia d'e visita timat :  
Eruet tost d'ar mezoù , e velas daou æl guenn  
O cundui an arer bars an creiz an dachen.

E vestr a laras neuze , sêsisset gant eston :  
Faus ê , evel a velàn , an accusation ;  
Me voar dre experianç ê faus an oll glê mou  
Zo grêt din a Isidor abeurs ar goal deodou.

Davantach c'hoas d'ar goude e vestr voe tourmantet  
Dre an nerz eus an domder er parc gant ar sec'het ;  
Mes Isidor en douar e c'harzou a blantas ,  
Hac eno , dre c'hraç Doue , ur fenteun a savas.

Unan eus a vugale e vestr qer a varvas ,  
Gant ur c'hlévet violant , hac en resuscistas :  
Qer bras voa e garantez en andret ar beorien ,  
Ma vultipli ar bara da rei an aluzen.

Un de pa yê d'ar vêlin hac ur sac'hat ganta ;  
Dre ur scoulat morfontus e lêzas da scuilla  
An anter eus e sac'hat da rei d'al lapousset ,  
En un andret en devoa en erc'h disoloet.

An dud pere a voa gantàn a gommanç da c'hoarzin,  
 Da ober goab anezàn; mes Doue gent ar fin  
 A recompanç Isidor, a bê e garante,  
 Rac carguet voe e sac'had dezàn gant larguente.

Pa voe en oad avancet, vardro un trêgont vla,  
 E choasas evit pried Mari a Gabeza,  
 Ur grouadurez parfet hac a gare Doue,  
 Hac en deussàn servichet gant peb fidelite.

An ên a roas deze erfin ur c'hrouadur,  
 Carguet a avantachou a goste an natur;  
 Mes ar maro diremed, dre orfrenanç Doue,  
 A greis ar fleur eus e oad en lamas digante.

Goude deced o buguel, ar rest eus o bue  
 E conclujont assambles miret ar chastete;  
 Ar yun, hac ar binijen, ar peoc'h, an orêson;  
 Voa nouritur o ene, plijadur o c'halon.

Goude beza cunduet pell-amzer assambles  
 Ur vuez ireprochabl ha leun a zanteles,  
 Pried santel Isidor a rentas ha ene  
 Etre daouarn ar Verc'hes, ar Zent hac an Æle.

Ebars en ompinion a Zantes e varvas,  
 Doue en e fersonach a rê miracloù bras,  
 Hac ar bez e pehini voa e c'horf enterret,  
 A voe gant ar bobl christen a bep tu enoret.

Ouz an disposition, ar sêson, an amzer,  
 Eus ar glo pe a sec'hor, en Spagn en e feder,  
 Hac e touguer en ezom er Processionou  
 Gant calz demeus a brofit bepret he religou.

Allas ! cetu Isidor e-unan dileset,  
 Cetu maro e vuguel ; ha maro e bried ;  
 Cetu muntret e galon gant qeus ha gant anui,  
 Tristidiguez, huanad, glac'har ha melconi.

Elec'h dont da hirvoudal ha da scuilla daërou ;  
 Evel ma zê ar c'hustum bars e sort rancontrchou,  
 E souffr gant patientet e boan hac e anqen,  
 Hac o sellet an énvou e parlant evellen.

An arret so positif, ur vech ê ret mervel,  
 Renta hor c'hout da Zoue, ar bed-màn dilezel.  
 N'en dom qet deut assambles, na n'e dimp qet ive ;  
 An eil christen a renqo licna eguile.

Mab uniq an Eternel da guenta a varvas  
 Hep e veza meritet, guechal var al Lamgroas ;  
 Biscoas aboe ar maro na bardonas da zen,  
 Nac a dra sur ha certen na bardono biqen.

Hon amzer var an douar n'en dê mert un ure,  
 A boan voar deut, na renqer partia adare :  
 N'en deus netra permanant, qement so a dremen  
 Ebars en eur bêr instant evel eur vogueden.

Me offrêc'h, o va Jesus, va glac'har, va zourmant,  
 Bars er gloar hac en nenor d'ho Passion sanglant ;  
 Cetu me brêma chomet, allas ! digompagnon ;  
 Ennoc'h emàn va fizianç va c'honsolation.

C'houi crouer d'an énvou ha crouer d'an douar,  
 Infinit en majeste, hac infinit en gloar ;  
 Mestr ha Roue absolu demeus ar firmamant,  
 Qement tra so ea antier ouzoc'h apparchant.

Goude beza anduret bars epad e vue  
 alz a hoan hac a fatiq, e plijas da Zoue  
 rfin dont d'e retira eur ar bed trubuillus,  
 vit beza en ênvou da james evurus.

Er bla mil cant tri-uguent ha dre vloas c'hoas gante,  
 bars en guir penitant e rentas e ene,  
 goude beza recevet e oll sacramanchou,  
 xortet e vignonet, ha grêt e adieuou.

E gorf a voe enterret gant calz a velodi  
 bars en berret Sant Andrean er guær eus a Vadri.  
 Nomb e bras a belerinet a-deu ato bemde  
 D implori e sicour, da visita e ve.

Eun daou-uguent vloas goude en em aparissas  
 Da un Itron vertuzus, ha dezi e laras :  
 Procurit d'am c'horf, Itron, ur plaç enoraploc'h,  
 Ha dirac ar Vajeste m'em bo sonch ac'hanoc'h.

An Autrou a Toled e gant nombr a vèleyen,  
 Var ar plaç, a zisqennas ar stol en e guerc'hen :  
 Pa voe fouillet an andret ma voe bet enterret,  
 E gorf hep corruption en autier voe cavet.

Qement fleuren en antier a gresq er jardinou,  
 Pa deu an nevez amzer gant o oll parfumou,  
 Ne roont qet assambles ur c'hoes qen excelant  
 Evel a rentas neuze ar c'horf demeus hon Zant.

Gant calz a zevotion ha calz a vodesti,  
 Voë bed a nos transportet da Ilis vras Madri,  
 Bars en Chapel an Escop en Ilis Cathedral,  
 Elec'h ma touguer dezàn un enor special.

Ebars en dranslation eus e gorf precius,  
 Voe grêt un nombr infinit a fejou merveillus,  
 An oll gleyer o-unan da son a gommanças,  
 Da galz a dud afflijet ar yec'het a roas.

Dre gontinuation-e rê bemde c'houlou  
 En andret e vignonet nombr bras a vuzudou;  
 D'ar mud, d'an dal, d'ar bouzar ha d'ar paour impotal,  
 Ouz e bedi gant fizianç, e roe soulajamani.

An drouc-speret a glasqas un nos precipita  
 En finfond an abimou un den devot deza,  
 Abalamour ma veve bars en pec'het mervel,  
 Ha ma voa dre-conseqant d'e Zoue infidel.

Ar Zant o aparissa a deu da chasseal  
 An diaoul trist ha confus d'e brisoniou teval,  
 Ha gant ur voes a zouçter a bedas e vignon  
 Da ober iuccessamant ur guir gôvession.

Ur fumelen afflijet seiz vloas gant ar c'hlénvet,  
 Isabel voa he hano, ha Tellez lezhanvet,  
 O visita'r sepultnr eus ar Zant gloriüs,  
 A recevas ar yec'het a drugare Jesus.

Sant Isidor o tonet den em apparissa  
 D'un esclao eus an Turqi en errol o veva,  
 En inspiras da renonç a grenn d'e falz lezen,  
 Ma teuas da embrassi hini ar gristenien.

Pêvar den clàn afflijet gant clénvet corporel,  
 Rentet en extremite en danjer da vervel,  
 O touch hepquen al lien en devoa lienet  
 An Autrou Sant Isidor, o devoe ar yec'het,



Cessomp breman, va fluen, ha lezomp a goste  
 Ar rest eus e viraclou, rac calz so aneze :  
 Ma ve ret deomp en antier donet d'o recita  
 Na vemp get prest er vech-mâ da zont da finissa.

Nê get eta hep rêson, nac hep bout meritet  
 E teuas ar pab Gregor a hano pemzecvet  
 Da laqat var cathalog ar zent all glorius,  
 An Autrou Sant Isidor, favori da Jesus.

Cetu echu an histor gaer demeus e vue;  
 Imitomp oll anezi gant fe ha carante :  
 Mar heuillomp e exemplou hac e vertuziou rar,  
 E vezimp oll evurus un de hep laqat mar.

Tosta amàn, den impi, ha yen eus a galon,  
 Deus da scol Sant Isidor, disq ober orêson;  
 Gra dre imitation hep nos ha bep mintin,  
 Da exerciç a gristen humblamant d'an daoulin.

Tud superb, ha colerus, toèrien da Zoue,  
 Heuillit douçder Isidor hac e humilite :  
 Pe seurt profit hoc'h eus-u diouz ho plarfêmon,  
 Nac oc'h enoriou monden, nac oc'h oll bombançon.

Un habitud criminel a so ebars er vro,  
 Da brofani alies ar Suliou, ar Gouëlio :  
 Isidor o implije da servicha Doue,  
 Oc'h exerci an euvrou demeus a biete.

C'houi, bugale dinatur en andret Mam ha Tad,  
 Perac oc'h-u qen cruel, qen cri, ha qen ingrat  
 Isidor a voa docil bars en qever e re,  
 Ouz o zrêti gaut enor, respet ha carante.

Peguenlies e pec'her siouas dre injustiç,  
 Dre anui, dre gourmandis, ha dre an avaris!  
 Isidor a bratige ar vertuziou control,  
 Hac a rê d'ar viçou-mâ bep moment ar brezel.

Eur re benac a laro : va foan so re galet  
 Evit gallout observi ar yuniou commandet;  
 Isidor a observe gant ur galon joaüs,  
 Nonobstant e fatigou ha labourion grevus.

Yaouanqis, bezit modest ebars en 'ho tillat,  
 Me ho conjur da veva bepret herve ho stat;  
 Isidor a voa contant eus e gondition,  
 Ar gloar voe poeson dezàn, ar bed-mâ ur prison.

Ma carfe al Labourer bemde var e labour  
 Qemeret Sant Isidor evit e vezilour,  
 E velfemp ar vedisanç, ar c'homzou goloet,  
 Souden en guir charite ha purete chenchet.

Mes na veler, er c'hontrel, nemet ambition,  
 Finesse, ha trompleres, ha pep seurt trahison :  
 Ar bed-mâ ê hon idol, ar c'hig, an ærouant,  
 Ha na sonch quasi nicun ebars er jujamant.

En àn, pa zàn da bourmen var bord ar menezou,  
 Ne glévàn nemet disput, dre oll bars er parcou,  
 Medisanç, tamaleres hac injurius piqant,  
 Blasfêmou, leoudouet, chansoniou insolant.

Cetu aze ar motif, ar sujet, ar rêson,  
 A denn coler ha venjanç Doue Roue an Tron,  
 Hac a rent infructuus ha vên an oll boaniou  
 A souffr al Labourerien bemde er c'hampagnou.

En eur dremen , selaouit eur guelennadures ;  
 Mar doujit ho coustianç hac ho silvidigues ,  
 Dilezit ho coal vue , ha pratiqit ar mat ;  
 allas ! goude ar maro e vezot divezat.

Na gollit qet a gourach , resistit constamant  
 Ouz an tentationou demeus an aerouant ,  
 Suppliit Sant Isidor dazont d'ho proteji ,  
 Hac e vezo hep doutanç dêc'h oll guir minic'hi.

En paros Pleudaniel , escopti a Dreguer  
 Bars en douar an Autrou ar Marqis Pelletier ,  
 En ur Chapel dediet da Santes Helena ,  
 Ema portret Isidor ; deut oll d'e vizita.

Bep Lun Fasq ar Pantecost , dre gonje hon Prelat ,  
 E rêr eno ar memoar a Isidor hon tad ;  
 Na douetan qet na deuy ar popl en afluanç  
 En deiz-se d'e saludi gant pep sort reveranç.

Un nombr bras a viraclou a ra Doue dreizàn  
 D'ar re a deu d'ar Chapel evit e visitàn ;  
 Rei a ra pep plijadur ha consolation  
 Da guement den en antier en ped a vir galon.

Un den ar principala-eus a Pleudaniel ,  
 Tremen a ràn d'ar silanç hep donet d'e henvel ,  
 En devoe un accidant a greiz e joaüsdet ,  
 Al lun Fasq ar Pantecost , ur bla so tremenet.

Var dro nao heur-anter voe hep comz na qerzet  
 Ar bed oll en condaone hac ar vedecinet ,  
 Pa voe goestlet d'ar Chapel , e commanças parlant ,  
 Ma receyas ar yec'het dre veritou ar Zant.

Ur buguel bian hanvet Mazeau an Hegarat ;  
 Mab Ezuant , ha Fant Callec aus a Enes Briat ,  
 En em vezas dre valeur en ur varazad dour ,  
 En gouelen diveza , hep gallout caout sicour .

Pa voe entre e divrec'h gant e vam astennet ,  
 Qement den e voa presant en crede decedet ;  
 Mes Doue hac Isidor o deus bet imploret ,  
 Hac o buguel en instant a so ressuscitet .

Dre un destin maleurus , Fant ar Borgn a Dreguer ,  
 E deus laqet c'hoec'h buguel , allas ! bars en lumier ,  
 Hep beza bet ar boneur da receo badiziant ,  
 Nonobstant e oll fatig , e foan hac e zourmant .

En em gavet ê brazes na divar ar seizvet ,  
 D'an Autrou Sant Isidor ê bet en em voestlet ,  
 Ha dre e brotection e qichen hor Jesus ,  
 E deus bet ur guilioud hac a so evurus .

Guillarm Janvier , habitant eus a Pleuveur-Gotter ,  
 Var ar guele afflijet gant clénvet ha mizer ,  
 O veza en angoni , gant an oll condaonet ,  
 Pa voe goestlet d'ar Chapel en devoe ar yec'het .

Eur buguel a Peuverit , impotent er c'herset ,  
 O visita Isidor a só het goellaet ;  
 Diaguent ne remue nemet var e flac'hou ,  
 Neuze e yas e-unan hac o lezas eno .

Eur buguel a Pleuvian , o chom bars en arvor ,  
 Goelc'het gant dour vertuzus feuteun Sant Isidor ,  
 Elêc'h ma voa diaguent notet ha daoubleguet ,  
 En deus , dre c'hraç un Doue , recevet ar yec'het .

Un nombr bras a viraclou en deus c'hoas operet  
 Aboe ma zê er c'hanton gant ar bopl invoquet;  
 Ma ve ret o ranconti oll en particulier,  
 E teufet da ramplissa nombr bras eus a baper.

Poent bras ê demp finissa hep avanç da vantach  
 Arretomp amâ bremân, concluomp hon ouvrach  
 Mar leqcomp en pratiq ar pezh on eus scrivet,  
 E vezimp er Barados un deiz oll curunet.

Supliomp a vir galon hon Tad Sant Isidor,  
 Da veza hon Avocad hac hor guir Protector,  
 D'hon presanti da Zone en articl ar maro,  
 Ha da c'honit ar victor var an oll diaoulou.

Dirijomp oll hon moeziou d'en pedi assables  
 Da apesi un Doue irritet qellies,  
 Da zivoal hon c'horf ato, da zivoal hon ene,  
 Ha da veva direproch ar rest eus hor bue.

Deut eta, oll Vretonet, deut oll a bep canton,  
 Deut da Zantes Helena da bedi hor Patron;  
 Rentit dezàn hoc'h homach, hoc'h henor, ho respet:  
 Mar en pedit gant fianç e vezot sicouret.

Sant Isidor so ive en ilis Plouigno,  
 Guir Batron ha guir Vignon Labourerien peb bro:  
 Deut d'en pedi, Bretonet, eus a greis ho calon,  
 Hac o pezo gant Doue e benediction.

FIN.



## GUERZ

VAR UR PLAC'H A VEPRISAS E ZAD HAC E MAM.

*Var ton Guertz an Danserez.*



CLÉVIT, còs ha yaouanq, selaouit, Bretonet,  
 Un exempl pitoyabl eus a ur Plac'h debordet,  
 Pehini a veprise e Mam coulz hac e Zad,  
 Doue e funissas en compagnunez vad.



E c'horf a voa galant, merc'h voa d'eul labourer,  
 Ouspen ma voa glorijs, meurbed e voa fier,  
 E zad eus e vicher a voa ur vigneron,  
 A chome e qichen ar guær eus a Chalon.



Evel ma voa plac'h coant, balamour d'e guenet,  
 Un den a galite en deus-li eureujet,  
 En devoa nombr a vadou hac eus a binvidiguez,  
 Ma voa re absolu p'oe laqet da vestres.



Abea e'hoec'h vloas goude m'oar plac'h-mâ eureujet,

E zad ive e mam a voa paour bras rentet;  
 Hac int sonjal o daou dont d'en em resolvi  
 Da vont da di o merc'h en esper chom ganti.



Pa errujont en e zi o deus-i goulennet,  
 O sonjal gant joa vras e vijent recevet,  
 O tislêrya penaus voaint e mam hac e zad  
 Ma teu o merc'h debordet ractal d'o scandalat.



Ar paour qès a dad, o clasq en em sicour,  
 A dennas prest e doq : bonjour, va merc'h, bonjour;  
 E mam a zaillas pront evit e ambrassi,  
 Mes boutet voe ganti ractal var leur an ti.



Sortiit, emezi, hac it prest alesse;  
 Me ne meus qet a dud hac a ve qer paour-ze;  
 Mez ameus ganêc'h-u, fê eo din-me clêvet  
 E vec'h din tad ha mam; mes n'ho couzanvan qet.



Evel ma voa, nos-du e houlenjont loja,  
 Balamour da Zoue, er c'hraou da viana:  
 An ingrates neuze a ordrenas ober  
 O c'has eus e bisach pront da di e fermier.



Rei a ras en e zi fest ha bal an nosves,  
 Eu amzer ma edo e zad e mam ivez

Er c'hraou var ar c'holo gant naon en o c'halon;  
Goude rei o danves d'e laqat da ltron.



Mes Doue ne fell get dezàn e ve netra cuzet,  
A bermet en nôsves-màn ma vije punisset:  
Qeit ha m'oa o tansal memes e creiz an danç,  
Gant e c'hompagnunez, e varv en o fresanç.



Cetu aze ar fin eus ar plac'h ingrates,  
Goude meprizout e zud. M'ho ped, laqit eves:  
Calz a ra evel houmàn, rac beza zeus merc'het  
N'o deus evit o zud nac enor na respet.



M'ho ped, abeurs Doue, oll bugale yaouanq,  
D'ho tadou, d'o mamou bezit oboissant;  
Douguit enor dezo ha dent d'ho rêspecti,  
Jesus ne vanqo get dont d'ho recompansi.

**FIN.**

---

E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.